

YF_0132_Oueske la bibaon oe

Deus unan me ya da zaou (div wech)
Oueske la bibaon oe
Ma mestrez zo ' korn ar c'hraou
Oueske la bibaon oe (div wech)

Deus an daou me ya da dri
Ma mestrez 'deus ur mell fri

Deus an tri me ya da bevar
Ma mestrez 'deus ur mell revr

Deus ar pevar me ya da bemp
Ma mestrez 'deus ur mell penn

Deus ar pemp me ya da c'hwec'h
Ma mestrez zo war ma lerc'h

Deus ar c'hwec'h me ya da zeizh
Ma mestrez zo war he neizh

Deus ar seizh me ya da eizh
Ma mestrez zo ur plac'h reizh

Deus an eizh me ya da nav
Ma mestrez zo ur plac'h vrav

Deus an nav me ya da zek
Ma mestrez zo aet da wreg